

Kantic Sant Tudec

Ton : Itron Varia Rümengol.

DISKAN :

*O sant Tudec, hor sant Patron,
Hirio ni ho ped a galon ;
Grit ma kresko bemdez ar feiz,
E Landudec hag en hor Breiz.*

I


Ervez lavar an dud desked,
Var dreurjou ar seizved kanved,
Kouent'brudet Landevennec
A veve enhan sant Tudec.

II

Gant sant Judul ha sant Jaoua
Menec'h kalonek eveitha
Dre vro Breiz hor sant karet
Feiz Jezus-Krist n'deuz prezeget.

III

Kenta Niz 'zo bet ama,
Savet ha benniget gantha
A lakas rei a c'houdevez
Hano sant Tudec d'ar barrez.



IV

En amzer-ze aotrou ar Faou
 Servicher bras da « Dad-ar-Gaou »
 A zisklerias eur brezel kriz
 Da Zoue ha d'an dud iliz.

V

Pa glevas oa menec'h santel
 En em vodet en eur chapel,
 E redas gaat he soudardet,
 Ha daou zant a oue bourrevet.

VI

Sant Tudec oc'h offerenna,
 Oue tizet gantho da genta ;
 Ha sant Judul o klask tec'het,
 Gantho d'he dro oue dibennet.

VII

Abarz mervel sant Tudec c'hoaz,
 Evel hor Zalver var ar groaz,
 A bedas evit e vourreo,
 Evit goulenn d'ezhan distro.

VIII

Evit gwir, nerz e bedennou
 A gonvertiñsas an aotrou
 Hag hema gant keuz d'he zaou laz
 A zavas manati *Daoulas*.

IX

Hirio siouaz, e kalz broïou,
 E veller c'hoaz meur a aotrou
 O wal-gass evel paianed
 Jezus-Krist hag he gannadet.

X

Digasset o deuz dizurziou
 Evit louza ar c'halonou,
 Savet ivez gizioù direiz
 A zo kontrol beo d'hor feiz.

XI

Plijit, sant Tudec, hor patron
 Lakaat gwir c'heuz en ho c'halon
 Vit ma velimp choaz gant dudi
 Ar furnez kristen o skedi.

Aotre da voulla.

Kemper, 8 a viz Kerzu.

P. JONCOUR, *Vekel bras*.